

**Rolland Charles** (Lannéanou 1862 – Gwerleskin 1940)

Bet savet e 1902.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

## Da baotred stard Breiz !

*War an ton a gerfot*

I

Sonn ar penn ! neb 'n-eus gwad ! ha bezom oll war hed !  
Prest da rei deuz vo kont, eun taol-chao ! mar bez red :  
An enebour kouezet, divergont a zao c'hoaz  
Hag a garfe lakaad reveulzi 'sort biskoaz !

Dizorhennet bep taol kanfarded an tu gwenn  
A stourm, a frink, a hop ! hag a hoari o fenn !  
Daoust ha ma vezont dornet en peb vodadego'  
'Deus c'hoant 'vid kement-se beza mestr en or Bro.

Kement digarez fall zo mad deze, kredit deh<sup>1</sup>,  
'Vid lakaad gwall dizurz ha bosenn en peb leh ;  
Rag ne glaskont ken tu, ken sorhenn, deiz ha noz,  
'Med gouarn war ar Bobl evel en amzer goz.

Lezom int da youhal ! delhom on troad er pal !  
N'efont ket ken a-bell, kaer o-devo tumpal<sup>2</sup>.  
Pobl Frañs sklêrijennet he-deus lavaret stard  
Rei beh d'an dud noazuz ! d'ar gaouiad, d'an trubard !

Ar Republikaned, 'benn ma'h ay mad an traou  
'Oar mad eo red deze disprada<sup>3</sup> nêt ar Gaou ;  
Gwelt sklêr en eur wech 'brz en peb doare kamm  
'Vid gelloud gand eeunder rei da beb den e zamm ;

'Vid treemn lost al leue 'biou genou ar re all  
Eun darn 'deus ijinet eun doare n'e' ket fall,  
A oar digarez dond da 'n em rei da Zoue ( ! )  
Ha 'n em dennont kempenn deuz kargou ar vuhe'.

O micher didalvez eo drailla paterio' ;  
Kousked o honsorted war goz kaoziou goullo ;  
Eren an dud dister, oll dindan o lezenn,  
Gand lavariou kontrol d'o buhez penn-da-benn.

Dibabet gand Doue, ar Zent hag an Êlez  
Goloet deuz traoñ-kreh gand broz ar zantelez  
Kristen deuz tud ken flour ma soñjfe 'n em diwall  
M'o-deus eur perz iskiz ! war gorre ar re all :

Gwalleur amañ d'ar re a zislar o homzou.

---

<sup>1</sup> deh : deoh.

<sup>2</sup> tumpal : fistilla.

<sup>3</sup> disprada : distruja.

Barnet 'vefont gante abred d'an iverniou.  
C'hoaz e vint fourgaset kement ha ken bihan,  
Ma rankfont bale sioul, pe ober kovig moan.

D'o stal eo red kredi heb gweled na kompren ;  
Senti hep krozmoli war-eeun d'o gourhemenn :  
Chom dall, gand ha bouzar a gorv hag a spered ;  
Mond da heul 'vel eul leue, pe 'kredit, pe rit ket !

'Vid kenderhel ar bed en eun heveleb stad,  
Eo e sao ar re-mañ kalz skoliou, kredit mad ;  
'Leh 'vez klasket ober deuz paotr ha deuz paotrez  
Eur pezh kristen diod ! klufan pe bigodez.

Rag micher beleien, meneh, leanezed,  
'Zo deski d'ar re all ar pezh na gredont ket :  
Rag seul-vui ma krede an dud picherezou<sup>4</sup>  
'Vint êzet da stleja dre o fri er poullou !

Peb doare divalo deut deuz o ferz 'vez mad ;  
Ar haerra traou, barnet, pa vint ket deuz o grad.  
Pa fazi ket ar Pab, kredit deoh, int d'o zro,  
'Deus urz en e ano da ober kement 'zo.

Ma ne zimezont ket, nen deo 'med 'vid beza  
Dishual da skrapad ha kaoud ar pep gwella !  
Se n'harz ket deuz eun darn da gemer plijadur  
Ha da zarempredi meur a blah koant ha fur.

## II

O galloud, eur wech c'hoaz, zo divent ha dispar.  
Mistr 'fell deze beza en Neñv ha war Zouar :  
Deze om korv hag ene, ne dalv ket lared nann,  
Adaleg ma vem<sup>5</sup> bet bete ma'h em ahann<sup>6</sup>.

O halon 'zo distag deuz mad ar bed paour-mañ.  
Ha 'velkent e karfent dastum oll anezañ :  
An oll draou deze 'zo mad, ed, amann ha kig-sall...  
A flemmont<sup>7</sup> diganem o c'hoari mouchig-dall.

Dastumit da gas deze pezh a gerfot d'o zi.  
Biken gwenneg ne deu deuz o ferz d'ho hini ;  
Poangnit oll heb ehan, c'hwezit an dour, ar gwad.  
Hag hini diwar ho koust er heit-se 'ray chervad.

Ya ! d'an dud a Iliz kasit a bep seurt traou.  
Magit an dud santel evel moh lard 'n o hraou.  
Gante 'mañ an alhwez a zigor dor an Neñv,  
Ha ma ne baeit ket e chomfot pell a-dreñv.

<sup>4</sup> picherezou : ger bet savet digand "picheri"

<sup>5</sup> vem : vezom bet ganet.

<sup>6</sup> ma'h em ahann : ma varvim.

<sup>7</sup> flemmont : a gemeront.

Kasit ! kasit atao ! peurleungnit deze o yalh.  
Biken ne vint klevet o lared deo a-walh :  
Red eo kaoud brahellou<sup>8</sup> ‘benn derhel en e blom  
Stal kement dizimez ‘zo dindan lezenn Rom.

O danvez ‘h a d’o heul ‘barz er houentchou braz,  
‘Leh e reont koñvers d’her hreski muioh c’hoaz ;  
Dre n’o-deus na bugel, heritour na mignon,  
E telhont da vernia bep taol madou eston.

Pa n’o-deus eveldom bugale da vaga,  
Na tad na mamm war hent, na trubuil gand netra :  
Pa om oll o kas deze na sort ‘deu war e giz,  
Sklêr-mad o-deus eun tu eur huz<sup>9</sup> spont hag iskiz.

Ar boan hag al labour atao d’ar memez rumm ;  
En-pad ma ‘mañ e benn o vernia, o tastum.  
Ha c’hoaz ne fell ket deze sikour paea tamm gle  
A rank peb den gwiriou d’e Vro ha d’e gontre.

Dastum an oll vadou ‘vid kaoud eun nerz dispar  
Da zerhel ar re all dindan o zreid, war var.  
Setu eno, tud kêz, stad ar beorien iskiz.  
Kuzet dindan mantell Mamm Zantel an Iliz...

Estlammet gand abeg deuz eun heveleb stad,  
Gouarnamant Bro-Frañs a reas eul lezenn vad<sup>10</sup>,  
Da reiza ar breuriez, da blênaad o daore,  
Ha gwel’ d sklêr en madou peorien ken a-zoare.

Ha kerkent garm ha trouz ! Ha kounnar en o hreiz !  
Evel pa ve an tan en pevar horn a Vreiz.  
Arabad eo stoka ar biz<sup>11</sup> deuz o gwiriou,  
Dindan boan da veza daonet a-bennadou<sup>12</sup> !

Paotred o *lien-groñj* a zañs ha ‘skrign o dent !  
Gwasoh ‘vid diaoulou, ken heñvel ken deuz sent :  
Nemed dre nerz, emeze, ne blegont d’al lezenn !  
Setu an oll skwer-vad demeuz o feiz kristen !

Koulskoude, peb den eeun ha peb den a-feson  
A houlenn ‘vo laket pep tra en e rezon :  
Ingali ar re-mañ ‘vo gwall-diêz atao ;  
Med red e vo korda ! pe ‘vezo jabadao !

### III

‘Bara er chabistr trizeg deuz an Ebesteled

---

<sup>8</sup> brahellou : berniou.

<sup>9</sup> eur huz : eun teñzor kuzet.

<sup>10</sup> eul lezenn vad : bez’ e oa “La loi sur les Congrégations”.

<sup>11</sup> stoka ar biz : galleg.

<sup>12</sup> a-bennadou : da viken.

Sant Paol a lavare ‘vel-henn d’ar Romaned :  
« Peb den mad ha gwirion ‘gle beza en peb bro  
Doujet er penn kenta d’an oll lezennoù ‘zo. »

Med ar re-mañ harpet gand tud gweñv, diskiant,  
Paeet mad da youhal !! mevel<sup>13</sup> a win-ardant !  
‘Ra kant mil fout ha kaer deuz Sant Paol ha sent all !  
Dreist-oll ‘leh ‘ouzont mad n’eus c’hoaz nemed tud dall !...

Ar wall-gredenn hirie en bro ar Vretoned  
A zegas dem memor dimeuz ar Chouanted,  
Hag eur vez eo gweled e chomfe Breiz karet  
Keid-all en dallentez war-lerh Broiou arBed !

Soñjit en dienez, er baourentez iskiz !  
N’eo bet gwechall on zud dindan tu a Iliz  
Pa oa an deog o ren ! an Iñkizision !  
An esklavaj dre-oll ! ar spont en pep kalon !

Gwelit hirie er Spagn, ‘leh ‘mañ o zroad er pal,  
Dre-oll ‘leh int chomet kreñv-mad ha dishual,  
Na pegen reuzeudig eo c’hoaz ar bobl izel !  
Rag dindanne n’eus ken ‘med anken ha brezel !

Ha c’hoant e-meum-ni c’hoaz da zistrei war on hiz ?  
Pa ‘mañ ar Frañs a-bez o klask dem ar frankiz ?  
Ar wir frankiz leal, en galleg “*Liberté*“ !  
A chom da virviken gante dan gazell yê<sup>14</sup> !

Doust ha ni ‘ve barnet da chom atao war-lerh,  
‘Vel gwir genaouerien da lipad ar zah-kerh ?  
‘Vel tud gouer hag abaf ; ‘leh mond war an a-raog  
Gand poellder ha kalon ! da zivenn on zamm krog.

Petra ‘meum da hortoz a-berz brini lontreg ?  
‘Zo mil hant ‘vloaz ‘zo war o hlud o prezeg ;  
Ragacherien gazuz o vralla o hloh faout  
‘Lar sklêr : « Degasit dem ! n’om mad nemed da gaoud ! »

Ha ne welit-hu ket emaoñ en em staoka  
‘Vid kaoud kistin grillet deuz an tan d’ar re-ma’ ?  
O debr brao dirazoh eru wech ‘vent deut er-mêz ?  
Hag a hoarz goap en kuz deus ho sempladurez.

‘Welit ket ‘deus talvoud<sup>15</sup> da zerhel o skoliou  
‘Vid na hellfom biken lenn sklêr en o hartou ?  
Digorit ho spered ! sellit mad en-dro deh<sup>16</sup> !  
Hag e welfot eo toull ar billig en peb leh.

---

<sup>13</sup> mevel : mevelien.

<sup>14</sup> dan gazell yê : dindn o hazell, sentuz.

<sup>15</sup> talvoud : interest.

<sup>16</sup> deh : deoh.

Rag deze ober skol 'vid netra aliez  
E reont deoh paea ker o lezoregez<sup>17</sup>  
O tond en pep stumm all da zuna deoh ho kwad ;  
Al labour 'raer 'vid mann 'vez kalz re ger dalhmad.

Hirie, kenvroiz ker, 'zo dre-oll neventi.  
Ha kement 'wel eun tamm hirroh 'vid beg e fri,  
'Zo skuiz o weled ar bed 'ez a dre vitrakou  
Ma houler 'vo desket kaerroh traou er skoliou.

Penn an dud a skiant 'zo torret gand koajo'  
Ha n'eus 'med an dud simpl da vond ken war o zro :  
N'e' ket gras d'o haojou p'eo en despet deze  
E-meum hirie en Frañs kemend a liberte ?...

Peb gwir dad, 'me kalz tud, a glefe kaoud frankiz  
Da zeski e vugel 'vel ma karo d'e hiz ?...  
Se n'e' ket gwir atao ; rag tad ebed nan eus  
Ar peur-zod da lakaad e vab war an hent treuz.

An den na vo biken er gelennet er gwir,  
Ha Gouarnament Frañs 'gle derhel stard de her :  
Mouez ar Bobl 'deus laret mond distag d'ar pal krenn !  
Ha nikun 'barz en Frañs n'hell mond dreist al Lezenn !

Piou 'h a koulskoude ? pere 'stourm ar muia ?  
N'eo ket seurezed, kredit, ar re wasa.  
Kement rumm anezo 'n-eus pleget d'al Lezenn  
N'int bet tamm hegaset na fourgaset gand den ;

Ar re 'dorr ar siell, an enebourien vraz,  
Eo ar rummou 'meum bet dirakom a-viskoaz.  
An dreitourien sourret ! paotred an drapo gwenn,  
Markizien, baroned, meneh ha beleien.

An daou rumm-tud teñval 'deu 'tao d'en em harpa  
Hag a garfe gweled ar bobl 'n em drailla,  
'Zo en kuz o voustra, stummet ganet o hlik<sup>18</sup>  
'Vid gelloud deuz dindan mouga ar Republik.

« An avel 'zo a-du, emeze, da wentad  
Ha da lakaad tangwall eo ingal pesort koad  
Pa n'om 'vid dond a-benn *outi* dre votadeg  
Gand arhant *a-ruz fall*, ni 'hell beza barreg. »

Kerkent ar stal 'n he sav, roet e' an urzou  
Dre-oll d'ar seurezed da chom er houentchou ;  
D'ar re 'oa bet eet kuit 'vid douja d'al lezenn  
Greet deze dond war o hiz... Red eo mond d'ar pal krenn.

---

<sup>17</sup> lezoregez : leziregez.

<sup>18</sup> hlik : galleg ; ribitaill.

Hag en-dreg pep kouent, dre an nerz kemeret  
N'eus nemed kontezed, beleien, baroned  
Oh isa ar Bobl kêz war an dud a lezenn ;  
Ar babouz 'n o genou, tamm heñvel deuz kristen.

A-daoliou baz-dotu hag a-daoliou boutez  
Eo e fell deze hirie sevel ar Gristenez.  
Ha riñsa pojou-kambr war benn soudarded kêz...  
Ar Bed oll 'zo mantret deuz ker braz santelez....

N'eus ket pell 'oa ranket kas soudarded a-leiz  
Da rei eur gentel vad d'ar Chinoazed direiz ;  
Ma ne gerom diwall 'vo red kaoud ar Chinoa  
Da zond amañ d'e dro da zeski dem beva.

#### IV

Liberte ! liberte ! a wahont sort biskoaz !  
Daoust pesort liberte ar foeltr a glaskont c'hoaz ?  
An hini da beurdrei ar bed war an tu-gin  
Da lakaad adarre ar bobl dindan o glin ?

Liberte da vouga koustiañs ar re all.  
Da gas ar bed a-dreñv, evel ma oa gwechall ?  
Da vaga kasoni dibenn koz kredennou  
Na chomont ken 'n o zav dirag ar skiantchou ?

Liberte da hweza brezeliou niveruz ;  
Dond c'hoaz da venniga lahadegou spontuz ?  
Da lakaad ar vinell d'ar houër a-nevez flamm ?  
Da droha komz ar re 'ziskuill o doare kamm.

Birviken ken ! m'hen tou !... hag e houlont petra ?  
Liberte da zerhel ar Gaou noazuz 'n e za' ?  
'Gav ket deze 'n-eus renet pell a-walh evel-se ?  
Hga ez eo digoulzet rei liñs<sup>19</sup> d'ar wirione'.

N'o-desu ket greet o gwalh evid diskar a-blad  
Al liberte ger-ze ! gonezet gand on gwad !?  
Gwall fentuz evelkent ! eo kleved eur seurt tud,  
O houlenn liberte d'o zro diwar o hlud !

Mez o stal a-blen-font<sup>20</sup> ! o dalh ! o c »hoant ! o le !  
'Zo kernn en kontrol-fet d'ar ger benniget se ? ?  
Liberte deze hepken ; med d'ar re all foeltr tamm :  
Peoh ha boued d'ar Hliked<sup>21</sup> da vond dre an hent kamm !

Liberte da zispenn ar Republikaned,  
Zo tremen mil diod o paea kanfarded !  
Honnez<sup>22</sup> n'eo ket ivez 'benn nebeud a amzer,

<sup>19</sup> liñs : ? leh.

<sup>20</sup> a-blen-font : penn da benn.

<sup>21</sup> d'ar Hliked : euz tu ar veleien.

<sup>22</sup> Honnez : al liberte.

Rag mouez ar Bobl 'lar deze : « beva deuz ho micher ».

O stal a zo barnet ! gand oll boblou ar bed,  
A houl ma labouro kement den a zebr boued !  
Rag n'eus den rediet da zastra e gorv paour  
Da bourvel deze magadurez hag aour !

Eun darn, peurgounnaret ! o-deus distaget krenn  
Tremen hep paea ken na gwirioù na taks<sup>23</sup>-penn :  
Ali mad da laeron ! da vond warne a-vern ;  
Ma ne ve den d'o harz 'vo yennet<sup>24</sup> ar hoz Lern !

Mar degouez reveulzi evel emaint o klask  
N'e' ket war goug ar bobl e stardo ken an ask :  
E-barz en on amzer neb a houlen kordenn  
Deuz e houg e-unan 'ray sur al lagadou !

Gwechall, pa oant Mistri o ouarn on zadou,  
Gwaz d'ar re a stourme tamm d'o gourhemennou :  
Barnet e vezent prest d'ar poaniou euzusa.  
An disterra ger-treuz, d'an toull da zisheolia...

Hag hirie pa houlen nom lealded 'vid an oll  
E yudont 'vel pa ve ar bed o vond da goll !  
Liberte ! emeze, da zalla bugale !  
Ni houlen kemend all da sklêrijenni 'neze.

Daoust ha peleh emañ, liberte mamm ha tad  
Rank kas o faotrezed d'o skoliou deze dalhmad ?  
Dreist-oll el leh n'eus c'hoaz nemed leanezed...  
Ni houlen kreñv ma vo dre-oll skolarezed<sup>25</sup> !

Eur rumm bennag, ni 'oar evid golo e deh<sup>26</sup>,  
A lar 'vel al Louarn pa oa tapet ar pech :  
« Ma leuskit da vond kuit, ne dapin ken a yer ! »  
Hag e chomfom kousket war gerioù ken dister ?...

Int ne glaskont frankiz 'med 'vite o-unan,  
'Leh ni a glask anezi d'an oll gwitibunan ;  
Med ni'lar 'no biken gwir frankiz tre ma vo  
Padet leanezed, beleien, gand ar vro.

'Benn ma'h ay mad an traou gand ar gwir Republik  
E ranko mond d'an traoñ pae kement 'zo er Hlik ;  
D'an traoñ ! Lezenn Falloux ; d'an traoñ ! ar saeou du !...  
D'an traoñ ! kement treitour 'zo c'hoaz demeuz o za' !...  
N'eo ket red kaodu eur zae gand eur werhed fentuz !

---

<sup>23</sup> taks : galleg.

<sup>24</sup> yennet ; gennet.

<sup>25</sup> deh : ne rim ket gand "pech".

Goude ober doueou ( ! ) ; beva ‘n eur stad noazuz !  
‘Vid kelenn ar bugel war an hent mad ha fur,  
A houlenn da genat on oberou da stur.

Ne gred oll da Zoue, ha koulz hag hini ni ‘oar,  
Heb heuill o arvezou om dezañ ken tost-kar,  
Hag eun tammig tostoh, ma vefe sellet piz  
Pe anzao ‘meum neuze eun Doue gwall iskiz !

Evid ma plij dezañ ar re ‘vir al Lezenn  
Hag a zalh an tosta da heuill e hourhemennou,  
Emaint eur gwall flipad war-lerh ar bobl izel  
Pe eo faoz ar hartou, ha kleuz an Aviel.

Ha m’on krog da ober war ze eul leor bihan,  
Ma lennit anezañ ne gollfot ket ho poan.  
‘Leh eo displeget sklêr an daolenn penn-da-benn,  
War Doue hag an Dud, ar Feiz e pep kredenn.

Ne zalein ket ‘ta feteiz war gement-se ;  
‘Velkent a-raog kuitaad gand nerz e prouvin deze  
Emaint hag e vefont, hag a-viskoaz int bet,  
‘Eneeb Lezenn Doue ! ‘eneb Lezenn ar Bed.

## V D’an dud a Iliz

Hini ar paour-kêz Krist ‘oa re zempl evidoh,  
Ma oa red deoh kredi traou sotoh pe sotoh.  
Da yenna<sup>27</sup> on arhant bep taol war ar bed-mañ  
Rag ne ‘peut foeltr doue na diaoul nemetañ !

C’hwï ‘lar en em gared, ne garit den ebed ;  
Tad na mamm, na pried, na bugel pa ‘peut ket.  
Renta ‘r mad ‘vid ar fall, gouzañv ha pardoni :  
C’hwï ‘zo feulz ! veñjanauz<sup>28</sup> ! ha leun a gasoni !

« Rentit ‘ta da Sezar ar pez ‘zo da Sezar ? »  
« C’hwï ‘stumm ‘eneb dezañ dre-oll eun nerz dispar ! »  
« Ma lezenn, eme Jezuz, eo hini an doujañs ! »  
Me ‘wel oh dirollet ! prest da skuill gwad en Frañs !

An oll dud, emezoh, ‘zo ingal rag Doue,  
Ha c’hwï ‘ra eun dibab brao-braz war o gorre :  
Beza ‘peut kroaziou sten evid yalh verr ar paour  
D’ar pinvidig lorchuz re arhant ha re aour.

Jezuz, gwisket dister,, ‘oa en tu ar beorien ;  
C’hwï, kaer ha lugernuz ! gand an ddu a voaien ;  
Ken aliez ma vez vodadegou en Frañs,

---

<sup>27</sup> Da yenna : da henna.

<sup>28</sup> veñjanauz : gourvennuz.



C’hwí ‘vez deuz ho kwasa o harpa an Noblañs.

« Na stoui ket da hlin dirag traou ven ar bed ! ! »

C’hwí ‘ra dirag sent koad, dislivet, preñvadet !

« Labourit ! kreskit oll ! ha leugnit an douar ! »

Ma rafem eveldoh, ar bed a ve war var !

Hag evel-se bep taol, a-eneb penn-da-benn :

Nahet ho kwir Doue ! karantez ‘vid kristen<sup>29</sup> !

Rediet da anzañ « ’dalv mann ho kevridi

Hag emañ er stad-se ‘vid beva dizoursi<sup>30</sup> .

Gwir dever pep den yah eo dougen frouez e ouenn !

Ha c’hwí, en gwir dud lor ‘ra ‘eneb eul le krenn !

Stourm deuz nerz ar galon ! nah an enor kaerra !

Hadet en gwad an Oll gand krouer ar bed-mañ ! !

Daoust petore furnez ha pesort karantez

Hellfe gwirizienned en kalon bugale,

Tud souret<sup>31</sup>, dizemez, greet dilez a bep tra<sup>32</sup>,

Ne reont ket zoken o deveriou kenta.

Ar Frañs a houlenn tud ? dimezit ‘ta d’ho tro !

Heullit ar wir Lezenn, hag ar zae er bloto’ !

Kalz welloh ‘yel’ an traou, en pep stumm, en pep leh.

Doue ‘n-eus tamm ezomm ho kwerhted diganeh.

Hoh-unan e lerit En-deus greet mad pep tra :

Neuze n’oh ket krouet da chom d’ober netra ?

‘Vid ma sao kaer an ed e-barz er parkeier,

Ma talh ar Bed da gerz, n’eo ket gras d’ho pater ?...

Kalz a zoug ar zae-ze a zo skuiz dindanni :

Rag hepti, c’hwí ‘oar mad, e heller ‘n em zalvi ?

Ha gounid kerkoulz all fiziañs or bugale

Hag o helenn gwelloh war hent kaer ar vuhe’ !

Tre ‘vo daou sort skoliou, disheñvel en pep tra,

En eur memez broad, en beh deuz o gwasa<sup>33</sup>,

O klask gounid spered ha kalon an den kêz

Ne erruo biken ar wir unvaniez.

Ar peoh paduz amañ, ar gwir entantamant,

Ne reno entrezom ‘med dre an deskamant ;

Ha tre ‘vo urz da drei en gin penn ar bugel

‘Kendalho kasoni ‘trezom bete mervel ?

---

<sup>29</sup> karantez ‘vid kristen : karantez ebed evid den.

<sup>30</sup> ‘vid beva dizoursi : **notenn gand an oberour** : Lennit ouspenn chabistr XXIII deuz Aviel Sant Vaze, ag an hini ne gomzont kammed en o zarmoniou ; (en hini ; a behini, er skrid orin).

<sup>31</sup> souret : pilpous.

<sup>32</sup> greet dilez a bep tra : **notenn gand an oberour** : ‘Vid eur gwel hepken.

<sup>33</sup> en beh deuz o gwasa : a-eneb an eil re ouz ar re all.

Klaskit 'ta eveldom mammenn ar wir vuhe'  
Se ne harzo ket ouzoh da veza tud a fe' ;  
Ar wir lezenn gristen 'lar dond d'en em harpa  
Hag e karer Doue 'n eru garoud an nesa !...

Med eun huñvre ken kaer ne erruo ket c'hoaz ?  
Rag c'hwi 'dorro kentoh evid plega, siwaz !  
Bountet gand tud lorhuz a oar mad eveldoh  
Penaoz eur wech maro ne reer ket kalz eveldoh.

Med daoust ha d'ar rumm-se da gredoud da foeltr sort  
O brasa stad a vez gweled ar bed-mañ tord<sup>34</sup>,  
'Vid yenna êzetoh ar bern pladenneien<sup>35</sup>  
A gouez dindan ho pao : hag a gred d'ho lezenn.

Ar re-ze, koulz ha ni, 'oar mad peleh emañ  
An dizanaoudegez gouli braz ar bed-mañ :  
« Ar Bastille, emeze, 'oa diskaret gand poan !  
Med sotich<sup>36</sup> ar bobl kêz 'gouezo ket ken buan ! »

Ya ! tyra vo beleien, frered ha seurezed  
O vaga dallentez e vo gwaderezed<sup>37</sup> :  
Krigerien all 'veldoh o stigma o lien,  
'Vel e ra kevnid louz da dapoud ar helien.

Rag d'ho heul 'vo biken 'med gevier, falz-soñjou !  
Istoriou kemmesket<sup>38</sup> da drei ar sperejou !  
Da harz ar skiantchou da zond war ar bale !  
Da zishentchi bro-Frañs diwar ar wirione' ! !

Hoh oll nerz, eur wech c'hoaz, 'zo en deñvalijenn,  
'Leh 'teu ho kaoziou fur da goueza en poultrenn.  
C'hwi 'zo tre 'vel eun ti, nerzuz e vogerio'.  
Ne chomo den e-barz ma vez lezet disto.

« Senti deuz ho komzou, lezel hoh oberou ?  
Eur seurt lavar hepken a zispenn ho roujou<sup>39</sup> :  
Rag se 'lar sklêr d'an oll emaoth war an hent fall !  
Hag ez eo ho tever<sup>40</sup> touelli ar re all ! »

AMEN

## VI

Greom fae, kenvroiz, war o hoz kaoziou flour,  
'H a gand o oberou ken buan gand an dour ;  
Rag petra 'dalv prezeg madelez d'ar re all  
Mar chomit hoh-unan dalhmad war an hent fall ?

<sup>34</sup> tord : war an tu gin.

<sup>35</sup> pladenneien : genaouecien.

<sup>36</sup> sotich : sottoni.

<sup>37</sup> gwaderezed : sunerien-wad.

<sup>38</sup> kemmesket : falset.

<sup>39</sup> a zispenn ho roujou : a zispenn ahanoh penn-da-benn.

<sup>40</sup> ho tever : ho pal.

Ne dalv ket sorhenni an dud a gaoziou mad  
Ma ne glasker an tu da gaerraad deze o stad ?  
Pa n'eus 'med al labour hag an unvaniez  
Da lakaad 'vel breudeur eun deiz ar poblou kêz !

Iskignad ar hlañvour hep klask dond d'her gwellaad  
'Zo lakaad eur palastr war gorre eur harr-goad !  
Ha maga dallentez gand mantell ar vertu<sup>41</sup>  
'Zo bodenni poaniou ha dizurz a bep tu.

A-benn yac'haad an den deuz e dechou amañ  
E ranko da genta gweled sklêr dirakañ,  
Hag ar wir sklêrijenn a zo er skiantchou  
Ha nann er burzudou nag en fals-kredennou.

Pa vem sklêrijennet war hent ar Wirione',  
N'on anvefom gwelloh an eil hag egile ;  
Pa ouezfom oll a-bez om kirieg d'an gwall-stad !  
Buan gand karantez ni 'deuy da 'n em dostaad ;

Heñchet gand ar furnez, neuze braz ha bihan  
A deuy d'en em harpa dre-oll gwitibunan ;  
Hag eun deiz 'vel breudeur, gand peoh ha lealded !  
Ni 'vo war an Douar er vrasa evurusted ! !

Hogen, kenvroiz ker, Gouarnamant Bro-Frañs,  
Ne glask 'med an hent-se, ker leun a esperañs !  
Hag e chomfom pelloh da enebi deuz se ?  
A-du gand ar higer ! ha ni ar paour-kêz leue ! ?

Neuze eo red anzaou om sod, mad da staga !  
Ha ne dleom beza skoazellet war netra ;  
Rag ar re n'int ket skuiz o tougen an tretou<sup>42</sup>  
A ranko c'hoaz da heul dastum ar hosa tachou !

Ar Frañs eo ar genta euz oll Broiou ar Bed !  
O klask gwellaad doare ar poblou hualet !  
Hag a-benn ma kezo pobl Frañs yah ha didrouz  
'Ranko beza skubet ar gwiad kenvid louz.

Dirag ar Sklêrijenn a laosk eun nerz dispar !  
An oll vasklou teñval a gouezo prest heb mar ?  
Hag an neb a stourmo pelloh deuz kerz ar bed,  
En-kreiz ar gorventenn a vezo bruzunet !

An Neñv a zalh a-du gand ar re 'n em zikour ;  
Ha reuzeudig 'oe 'tao e vrasa enebour.  
« An niver 'ra lezenn ! ». « Mouez ar bobl, mouez Doue ! »

---

<sup>41</sup> ar vertu : galleg.

<sup>42</sup> an tretou : ar sternachou.

« Spered ar Bed o kerz eo e Spered ive' ! »

A-benn ma 'n em gavo ar Spered da ren  
Zikour plênaad an hent eo dever peb gwir den ;  
Hag eur wech ma vefom oll unanet en hent mad,  
Ni zanto dorn Doue o rei deom e vennad !

*Gwerleskin, d'an 10 a viz Eost 1902.*